



Bleun-Brug Landivizio a vo eur mor a gan hag a bedenn
d'an 29-30-31 a viz Gouere.

PHOTO JOS LE DOARÉ

Bleun-Brug

Niv. 82 (Miziek-Mensuel)
Koumanant-Abonnement : 500 Fr.

MEZEVEN-GOURE 1955

TAOLIT EVEZ MAT

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1955 ?

Kasit 500 lur (600 lur kour. a enor — 1.000 lur kour. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridoù da : Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).

TAOLENN

War dreujou ar Bleun-Brug, gant L. B.	1
Da sklerijenna hon hent, gant V. F.	2
Pa zigore an noz, gant B. E.	8
Mari-Anna Abgrall, gant Y.-P. P.	9
Glaoda 'r Prat, gant L. Lok	11
Brezoneg flour an Ao. Perrot	14
Breiz e Fatima, gant J.-M. Breton	16
Ar meder, gant G.	17
Rimadellou bugale, gant Kerlann	18
Keleier : B. B. Callac	20
Ar besketaer e Breiz	21
Brezoneg war ar mor	22
Kañvou	24
Bleun-Brug Landivizio	25

MADOBEROURIEN

Evit Roz-Bleuniou :

M. Richer, Brest : 1.000 lur — Dimezell Y., Paris : 1.200 — Y. Oule'hen, Méri-
gnac : 350 — M. Larvor, Lyon : 1.000.

Izili :

Ao. Cadoudal : 500 lur — Ao. Colleau, beleg : 500 — Ao. Troal, beleg : 500 —
Ao. Jezequel, beleg : 500 — Hiron Jacob, Rosko : 1.000 — J. Chapelier, Paris : 500
— Ao. Person, St-Dere'hen : 500 — Ao. G. Bernier, an Oriant : 1.000 — Ao. Motref,
beleg : 500.

War dreujou ar Bleun-Brug

Rouez moarvat eo an dud a deu da skuiza gant an hañv.

Dirak an dudi a gaver en e serr e teu soñj d'eomp meur a wech eus
komz diboell an abostol war menez Thabor gwechall : « Na brao eo
beza amañ ».

Met, siouaz, penaos miret ouz an amzer da drei, penaos miret ouz
dent he rod didruez da gregi ennomp ha d'hor chacha d'e heul ?

N'eus netra badus en hor servich hag abalamour da se e vezomp ive
ken alies ankeniet...

N'eo ket, hep eur begad melkoni, hor beus gwelet adarre gouel
Yann o vont ebiou d'eomp. Setu ni, dre gaer pe dre heg, loc'het eur
wech muioc'h war hent torgennek ar goañv a zeu...

Ken buan e tremen pep tra, m'omp en em gavet ive, buan ha buan,
koulz lavaret, e derc'hent « EURED AOUR AR BLEUN-BRUG » a dle
beza lidet gant kement e sked, e deizioù diweza ar miz.

Abaoue bloaz a zo, e c'heller lavaret, er staget a-zevri da aoza ar
gouel bras, hag, adalek vremañ, Landi, kreizenn bro-Leon, a zigor
d'eomp he c'halon hag he divrec'h evit kemeret perz ennañ...

Evel ma tigas sonj d'eomp an Aviel, leun a had a gouez war an
douar... Met dre faot an hader, n'en deus ket gouezet kempenn mat an
dachenn, pe, dre faot an dachenn he-unan, darn eus an had ne zou-
gont ket a frouez...

Araok taoler en douar an had, a dle diwan ha bleunia warnañ ar
BLEUN-BRUG, an hader bras, m'eo bet Y.-V. Perrot, en deus dibabet
piz ar greun ha kempennet dreist e dachenn. Dindan gliz hag heol an
neñv frouez puilh a zo savet...

Ar frouez-se, eostet, a vloaz da vloaz, abaoue hanter-kant vloaz 'zo,
e grignol Breiz-Izel, eo ez omp pedet, holl, da vont da welet da Landi.
Ar Bleun-Brug, c'hoaz en e gavel, du-hont e bali maner Keryann, a zo
bet luskallet gant eur gall, unan eus kaera sperejou e amzer, an
Ao. DE MUN. Eur gall c'hoaz, digor ive e spered, unan eus prised an
Iliz, ar C'HARDINAL ROCQUES, Arc'heskob Roazon, eo a deuo da lida e
eured aour, o tiskouez dre eno, a-wel d'an holl, e fell d'ezañ bale bepred
el lealded hag er sklerijenn, dindan banniel Feiz ha Breiz, hirio evel en
deiz kenta :

Da genta Doue
Breiz-Izel goude
Hag e yez ive...



Mont a raimp da Landi evit taoler eur zell war labourou an hanter-
kant vloaz tremenet, evit trugarekaat Doue eus e c'hrasou, evit meuli
hag enori memor an hini, en deus roet e holl vuhez d'ar Bleun Brug,
evit kemeret lañs da vale sederoc'h war araok, en dachenn digoret
gantañ...

L. B.

Da glask sklerijenna hon hent

« Petra emaoe'h oc'h ober, c'hwi, paotred ar Bleun-Brug, ha kement hini a labour war an heveleb tachenn, nemed trei mein da zec'ha pa vez glao ? Domaj eo ho kweled o koll hoc'h amzer evel-se gand traou ne lavaran ket noaus. met didalvez ! »

Setu ar pezh a glever ; hag e-keit-se ez a war stankaat bemdez ar re a zo a-zevri o klask rei lusk da Vreiz ha da gement a aparchant outi : yez, arzou, folklor... ha kement'zo. Gelloud a c'hellfen dibuna amañ eun aridennad anioù tud ha ne vefe ket mez he embann ; kredit ac'hanoun, estreged tud dizek pe istrogetel a zo o labourat war-dro ar Bleun-Brug ha war-dro an holl unvanieziou all. Lavaret a rankomp, gwir eo, n'emañ ket an holl akord na war ar pal diweza da zivizout na war an doare d'e dizoud. An dra-ze ne vir ket e c'hell beza unvaniez er memez tra.

Kreñvoc'h e vezer pa vezer holl o sacha war en heveleb sugell, gwir eo ; meur a zigell a zo avât evit stleja karr Breiz : beza holl o sacha war ar memez karr a zo brao dija. Ni a gred ez eus meur a dachenn da labourat evit Breiz hag ar Vretoned : peb-hini a boagno diouz an tuet hag an dornet ma 'z eo evit tra pe dra ; peb-hini hervez e stumm-spered. Arabad eo avad e teufemp d'en em gia da deurel hor malloz war hemañ pe henhont war zigarez ne labour ket krenn-ha-krenn war an heveleb ero ganeomp, war zigarez ma tispign e boan war eun ero dibabet gantañ ha n'eo ket war an hini hon eus ni dibabet. E-touez ar re a stourm evit Breiz ez eus lod moarvat hag a zo re striz o menozioù : lod ne welont silvidigez Breiz nemed gant ar bolitikerezh, lod all netra nemet gant ar yez, lod all netra nemet gant an arboellerezh hag ar binvidigezh danvezel, lod all netra nemet gant al labour speredel ha relijiel, lod all netra nemet gant ar folklor, gwiskamanchou, dañsou ha biniou... Ni a gred e heller ober labour vad evit Breiz hag ar Vretoned war beb-hini eus an tachennou-ze, pouezus pe bouezusoc'h, talvoudus atao, ennañ eun dalvoudegezh hag a yelo dreist harzou hor bro.

Marteze e vefe êsoc'h en em glevet ma vefe enaouet eun nebeud touriou-tan evel ma vez grêt da heñcha ar vartoloded war riblou moriou Breiz.

Peb-hini a gav d'ezañ, evel just, emañ ar wirionezh gantañ. Setu ni da vihana oc'h enaoui hon tour-tan.

✱

Doue da genta.

Evidomp-ni emañ Doue da lakaat da genta ; Doue krouer ha mestr peb tra ; e hloar dreist peb tra ; d'ezañ peb gwir.

An den a zeu da c'houde, an den krouet gant Doue evit e gared hag e zervija ; d'ezañ an dever da zervija Doue hag en abeg da ze ar gwir d'e zervija a eneb da beb mahomerezh, a eneb da beb sklavouriezh.

Er penn diweza, an holl grouadurien a zo anezo war an douar, deuet eus a dre daouarn Doue, krouadurioù buhezeg pe zivuhez. Da heul, an holl grouidigeziou, ijinidigeziou, savadurioù deuet eus a berz an den, a berz e spered pe eus a dre e zaouarn.

Evit e c'hloar eo en deus Doue krouet peb tra war an douar, hag ivez evit sikour an den da veuli e grouer. En em vataat a hell an den eus an holl draou krouet gant Doue, beteg o distruja zoken mar deo red evit e vad e-unan ; Lezenn an holl grouadurioù-ze hag o flanedenn eo kana gloar da Zoue ha beza e servij an den, nemed ha dond a rafe an den, dre an uzaj grêt anezo, d'en em izelaat ha d'en em zistruja ; eun uzaj fall e vefe neuze dra n'abeg ma 'z afe a eneb lezenn Doue hag a eneb lezenn an den e-unan. Fall pe falloù e vefe kont ivez

ma teufe an den da veza sklavour tra pe dra krouet gant Doue evitañ : arabad eo cheñch penn d'ar vaz !

Ar c'hrouidigeziou a berz an den a zo heveleb kont ganto ; grêt int evit an den ha n'eo ket an den evito. Dreizo o-unan e kanont ivez gloar Doue dre ma 'z int evel eulfennou eus nerz Doue, eus Kaerder Doue eus holl perziou Doue ; med e Keñver an den ne dint nemet *binviou*, ha n'o deus ken gwir nemet gwir ar binviou. Fall int mar dint eur skoilh evid an den war hent e ziorroadur a zen pe war hent e zilvidigezh a grouadur Doue. Mad int ma sikouront an den da vond beteg penn ar blanedenn merket d'ezañ gand Doue. Ar pezh ma 'z int dreizo o-unan n'eo ket abeg a-walh evid enebi outo pe o harpa, med ar pezh ma 'z int e-keñver an den. Krouidigeziou ha savadurioù a-berz an den a zo hag a vo mad en eur vro, fall en unan all ; mad d'eur mare eus istor mab-den pe istor eur vroad tud ha fall d'eur mare all.

War ar menozioù-ze eo barn ar savadurioù hag ar c'hrouidigeziou a-berz an den evel eur yez, doare-ren eur hoblad tud, doare-ren an darempredou etre ar broadou, an darempredou war dachenn an tiegezh, pe an arboellerezh, an doare da labourat pe d'en em zidui, an doare d'en em wiska... ha kement 'zo.

✱

Kudenn ar yez.

Kemeromp eur yez, ar brezoneg lakomp ; ijinet eo bet ar yezou gand an dud evid ma c'hellfent en em intent gwelloc'h kenetrezo : eur *beñveg* a *zarempredou* eo da genta. Goude-ze, o veza m'he deus eur hoblad tud lakêt en he yez ar peb gwella eus he spered hag eus he c'halon evit stumma ar yez-ze ; o veza m'o deus tud ar boblad displeget, kanet ha skrivet, er yez-ze, menozioù o spered, trivliadennoù o c'halon, huanadennoù ha luskadennoù o ene, furnez ar geiz dastumet ha pinvidikêt a rumm da rumm, ar yez a zo deuet da veza evel spered karrekêt eur hobl, eur *beñveg* a *zevenadur* hag a *ziorroadur* evid mab-den, evid izili ar hobl-se end-eñn da genta, eur vammenn a darzo diouti pinvidigeziou meur eur boblad tud. Met, kaer a vo poueza ha poueza war ar poeñchou-ze, ne vezo gwech ebet eur yez nemed eur *beñveg* e *servij* an den. Eur *beñveg* n'en deus ken gwir nemet gwir ar *beñveg*. « N'eo ket ar yezou eo o deus gwiriou, evel ma lavare an aotrou F. Falc'hun, med an dud a gomz anezo. » Ma teu eun den pe eur hoblad tud da drei e venoz diouz *beñveg* pe *veñveg*, e gwir pe e gaou, petra reot ? N'eo ket awalc'h lavared hag aslavared ez eo ar brezoneg « Yez hon tadou » evid ma vo gounezet ar stourmad evid ar brezoneg. An alar koad ivez pe an alar bihan stlejet gand kezeg pe zaout a oa alar hon tadou ha ne din ket da vired ouz an alar bihan da vervel, kaset d'ar mirdi gand ar braban hag ar stlejerezh-dre-dan.

Abegou all donnoc'h a rankomp da zisplega evid savetei ar brezoneg. Arabad eo komparaji traou evel-se, a vo lavaret : eur yez hag eur *beñveg* dister. Siwaz ! evid kalz Bretoned, ar brezoneg a zo mad da lakaat er mirdi e kichen an alar-koad.

Ma teufe ar Vretoned da gompren e c'hell servijoud ar brezoneg d'ezo evel *beñveg* a *zevenadur*, ma teufent da intent eo ar brezoneg beo, bremañ c'hoaz, eur *beñveg* mad da ziorren o spered hag o c'halon, neuze e vefe kavet muioc'h a dud da stourm evid difenn ar brezoneg ; gwelloc'h a rafent : poania evit gwellaat ar *beñveg*, e binvidikaat, e gaeraat evit ma teufe da veza talvoudusoc'h a ze ar zervij a rentfe d'ezo. Eur *beñveg* a vez poaniet gantañ n'eo ket ablamour d'ezañ e-unan, med ablamour d'an dalvoudegezh en deus evid an den.

Met ma teu ar Vretoned da gredi d'ezo eo didalvez evito ar brezoneg, eo ar brezoneg beo eur skoilh, evid an hini a gomz anezañ, war hent an araokaat speredel ha skiantel, neuze e lezint ar brezoneg da vervel, e sikourint ar brezoneg da vervel.

Red eo anzañ ez eo stark e Breiz an dud a gred d'ezo eo ar brezoneg eun dra didalvez evito, eur skoilh zoken. Marteze ez eus bet stourmet evid ar brezoneg heb sklerijenna awalc'h ar sperejou, heb diskouez awalc'h talvoudegez hor yez, heb displega sklêr penaoz an dud a labour evid derc'hel beo ar brezoneg a glask gwella mad ar Vretoned ha gwella mad ar bed. E-keid ha ma n'hon devezo ket gounezet ar sperejou d'ar menoziou-ze, n'hell netra na den mired ouz ar brezoneg da vervel ; ne dalvezo da netra skei a daoliou pounner — evel unan bouzar — evit lavared e ranker derc'hel d'ar brezoneg ; ar brezoneg a yelo war a-dreñv. Klask mont d'an dud dre nerz ha dre heg a zo koll an amzer. Ar veleien o deus rediet bugale da zeski o c'hatekiz e brezoneg en despet d'ezo hag en despet d'o c'herent, heb kemeret an disterra poan d'o c'hentelia ha d'o sklerijenna, o deus grêt gaou ouz ar brezoneg : lakêt o deus en neiz viou hag a zo difoupet anezo laboused bihan leun a zismegañs evid ar brezoneg. N'eo ket dre heg e vezo dalc'het beo ar brezoneg met dre gaer. Digeri ar sperejou eo a zo da ober ha n'eo ket o mac'ha. Mar deus er bed eur boblad tud ha n'heller ket he ren dre heg, kizidig war boent ober he fenn he-unan, poblad ar Vretoned eo hag hen diskouezet he deus e kerz he istor.



Eur yez all.

Hag ar galleg ? Daoust ha gwir e vefe ez eus tud hag a zav kounnar enno pa glevont eur Breizad brezoneger, dreist-holl unan diwar ar mêz, o komz galleg ? tud hag a gavfe gwelloc'h e glevet o komz saosneg pe spagnoleg, pe c'hoaz o c'houzoud brezoneg nemet ken ?

Koulskoude e ranker anzav eo eun dra vad d'eun den gouzoud eur yez all estreged yez e gavell ; d'eur brezoneger muioc'h c'hoaz eged d'eur galleg pe d'eur saosneg. Ha goude ma vefe ar brezoneg eur yez a zevenadur ken talvoudus hag ar galleg pe ar saosneg, e-giz beñveg a zarempredou etre an dud, dre ar bed, emañ war lerc'h, n'eus ket da vare'hata. Red eo d'ar Breizad gouzoud eur yez all estreged ar brezoneg, d'an Iwerzonad gouzoud eur yez all estreged an iwerzoneg. Ar genta eus ar yezou all da zeski e Breiz goude ar brezoneg eo ar galleg, araog ar saosneg, pe ar spagnoleg, pe ar c'hembraeg zoken ; ar genta eus ar yezou all da zeski en Iwerzon goude an iwerzoneg eo ar saosneg. Ar galleg eo a zervijo ar muia d'ar Breizad evid e zarempredou pemdezeg hag ivez evid diorren e spered. Mar deo ez awalc'h d'ar Breizad a-vremañ kaoud eus ar galleg eun anañoudegez doun awalc'h evid suna ar mël a zevenadur a zo er yez-ze, ne lavaran ket kemend-all eus ar saosneg pe eus ar c'hembraeg zoken.

Diouyezeg e fell d'eomp beza, diouyezeg e rankomp beza, brezonegerien ha gallegerien da genta. Goude-ze e chom digor frank-frankoc'h zoken-dirzomp, an hent evid deski yezou all, yezou a zevenadur pe yezou a zarempredou.

Ez e vo d'eoc'h gounid d'ar Brezoneg — gounid a galon ! — eur Breizad hag a oar galleg mad ; diêz e vo d'eoc'h hen ober gand eur Breizad ha ne oar nemed brezoneg pe a vez luget abred e galleg. Setu perag eo kalz êsoc'h, en hon amzer, kaout stoumerien evid ar Brezoneg war ar mêz, e-touez ar vrezonegerien, eget bremañ ez eus tregont pe hanter kant vloaz. Setu perag, en amzer dremenet, gwella difennourien ar brezoneg — nemed hiniennou a ve — a oa tud hag a ouie galleg mad. Gant brezoneg nemetken pe gand, ouspenn, galleg hanter zesket ha netra mui, o deus bet, hon tud koz, re aliez, mez ganto o-unan ; ped gwech, ivez, pe er c'hazarn pe er c'heriou, ez eus bet grêt ar zod ganto hag ez int bet gloazet doun ! Eur Breizad ha n'eo ket gwall zesket war ar galleg, hag en deus bet da c'houzañv en abeg da ze, a glasko da genta lakaat e vugale da zeski ar galleg : « Brezoneg awalc'h a ouezo atao ! » — ar pezh n'eo ket gwir ! — « Me am eus bet poan awalc'h o veza n'oan ket barreg awalc'h war ar galleg, ne intentan ket e tigouezfe an hevelep c'hoari gant va bugale. » Setu ar pezh am eus bet klevet meur a wech ; ne dalv ket stouva an diskouarn. An abegou-

ze eo a ro da gompren d'eomp perag ez eus kalz parrezioù diwar ar-mêz ha ne vez mui komzet nemed e galleg d'ar vugale vihan ha koulskoude n'eus ket e spered ar gerent an disterra dismegañs evid ar brezoneg, pell diouz eno.

Eur Breizad hag a ouezo galleg mad, a vezo ez da c'hounid d'ar brezoneg hag a vezo buan awalc'h troet da zeski ar brezoneg d'e vugale ez-vihanig : « Galleg awalc'h a ouezo atao, pa 'z ay d'ar skol ! »

Setu va zoñj war an doare da zavetei ar brezoneg : n'eo ket avad o tismegañsi ar galleg pe o kaea outañ. Piou, e Breiz, a c'hellfed da gaoud da zismegañsi ar galleg nemed tud hag a zo ez d'ezo hen ober pa ouezont mad ar yez-ze, ha pa ne ouezont, awechou, nemed eun trefodach brezoneg.

Ar brezoneg n'eo ket eun doue evidoun, kennebeud ar galleg. Ni, Bretoned, n'omp ket grêt evid ar brezoneg nag evid ar galleg, nag evid yez all ebed ; ar yezou eo a zo grêt evidomp, n'eus aze nemed binvioù a zevenadur hag a zarempredou ijinnet evid servijoud d'an den, evid servijoud d'eomp. Arabad eo cheñch penn d'ar vaz.



Ar vro.

Pa zell an ouz stad broad ar Vretoned e touez ar Broadou eo an hevelezh tra.

Ar Vretoned n'int ket grêt evit Breiz — kemeret e giz eun douareg ; med Bro-Vreiz grêt — hirio — evito. Mar deo gwir o deus an darn vuia eus ar pobladoù tud cheñchet yez eur wech ha meur a wech en o istor, ken gwir all eo o deus ivez cheñchet bro. Douar Breiz n'en deus gwir ebed dreizañ e-unan ; n'eo nemed eur gourenez krouet gand Doue evid rei repu da vab-den ; eur boblad tud hirio, unan all dec'h, unan all warc'hoaz, astennet pell pe belloc'h he harzou eus an eil kantved d'egile. Ar Vretoned eo o deus gwirioù. Pa gomzer eus gwirioù Breiz, eus gwirioù ar Vretoned eo e vez ano.

Evid ar pezh a zell ouz darempredou broad ar Vretoned gand ar broadou all ez eus bet deuet kemm e-kerz an Istor. Pehini eo an doare gwella en hon amzer. Beza distag a grenn diouz gouarnamant Pariz ? Kaoud eur stumm renerz gand muioc'h a frankiz evid ar pezh a zell ouz mererezh pe zevenadur ? Derc'hel d'an doare a vremañ ? Arabad eo respont d'in : « Gwelloc'h eo e vefe distag ablamoù m'edo kont evel-se gwechall. » An abeg-se ne dalv netra evidoun, n'eus ano gantañ nemed eus eur zavadur ha n'eo ket eus an den. Arabad eo respont d'in : « Gwelloc'h eo, ar stumm a-vremañ ablamoù m'emañ kont evel-se abaoe an dispac'h vraz. » Abeg all ken didalvez. Traou a zo hag a c'hell beza mad evid eur boblad tud e mare pe vare eus he istor ha fall en eur mare all. Ar respont a blijfe d'in eo an hini a zavfe diwar ar goulenn all-mañ : « Penaoz e vefe ar gwella evid Bretoned hon amzer ? evid o diorroadur a dud, evid o zilvidigezh ? » Ha displega neuze frêz ar perag hag ar penaoz da harpa ar respont.

Ha c'hoaz n'heller ket difuilha ar gudenn en eur zerhel kont eus ar Vretoned nemet ken. N'emaomp ket, ni Bretoned, hon unan war an douar ; nebutoc'h nebeuta emaomp hon unan, muioc'h mui o deus ar broadou ezomm an eil eus eben. En eun tiegeziad tud, e rank pep-hini derc'hel kont eus ar re all, en em enka ha dioueret evid mad ar re all. E familh vras ar broadou emañ kont en hevelezh doare. Lezenn ar gwir eo lezenn ar garantez ; lezenn ar garantez eo aliez lezenn ar furnez. N'eo ket diwar fae eo divizoud eta na dibaba ; n'eo ket diwar eur froudenn na diwar lusk ar galon, med diwar gompren mad e peb tra.

An doare m'eo urziet ar broadou hag ar pobladoù kenetrezo a zo eun dra ijinnet ha diazezet gand an dud : awechou dre gaer, awechou dre heg, diwar goust brezel ha lazerezh. Ne ran ket eun doue gand ar stumm-mañ pe gand ar stumm-ze. Lakaad a ran eo mad, en dervez a hirio, ar stumm a zeu war zikour an den — hirio — da vont war raog ; fall an hini a ra gaou ouz an den. N'eo

ket d'an den chom dindan c'haou ablamour d'eur zavadur ; d'ar zavadur eo plega, kemma, mont da get, hervez gwella mad an den.

Ma kredfen e vefe gwelloc'h evid ar Zaozon, ar Hallaoued, an Alamaned ha kement 'zo, ne vefe mui nemed eur vro eus Europa a-bez, me a vefe evid unani Europa ha goude ma rankfe unan pe unan eus ar broadou dioueret tra pe dra diwar-ze. War eun dro eo dleet derc'hel kont eus mad pep broad hag eus mad boutin an holl vroadou. Ma kredfen e vefe gwelloc'h evid holl dud Bro-Frañs e vefe roet muioc'h a frankizioù d'ar broadou bihan a zo bet unanet evid ober Bro-Frañs, me a vefe a du gand an doare-ze da ren ar Vro.

Lod a zo hag a gred e c'hellfed war eun dro unani Europa ha rei kalz muioc'h a frankizioù d'ar broadou bihan ha n'eus anezo hirio nemed rannvroioù, dreist-holl war dachenn ar zevenadur ha zoken evit meur a dra war dachenn ar mererez.

N'eo ket difennet klask ar wirionez ; nemed eo red poueza mad peb tra, heñchet gand eur spered eeun ha n'eo ket hebken gand froudennou pe youlou a beb seurt. N'eo ket difennet embann ar soñj an-unan, klask gounid ar re all ; èz eo kredi ne vo ket an holl a-unvan ha goude ma vefe leal peb-hini gand e venoz. E peb menoz pe dost ez eus eul lodenn gwirionez ; arabad da zen ebet kredi en defe lonket al loar hag ar stered hag ar spered glan da heul !

Ma kemerfen kudenn an trevadennou (colonies) e rankfed heulia an hevelezh menozioù evid kaoud ar wirionez.

Evel-se ivez evid an doare diabarz da ren eur boblad tud. Ne ran ket va doue gand kaoud eur roue da ren ar vro, pe eun impalaer pe eur republik pe eur stumm-renerez all bennag.

An eil hag egile a zo bet ijinet gand an dud ; an eil hag egile a c'hell beza mad pe fall hervez an digouezadoù. Ar gwella doare-gouarnamant hirio evid ar pobl-mañ-pobl eo an hini a rento hirio, da dud ar vro, dre vras, ar gwella servij.

An den da genta, goude Doue, ha, warlerc'h, an holl draoù all evit gloar Doue ha servij an den,

Pa vez eur menoz bennag er spered 'ha pa vez c'hoant gounid an dud all n'eo ket awalc'h hopal, red eo displega ar penaoz hag ar perag.



Kalon domm ha spered lemm.

Ha kement a aparchant a hend-all ouz Breiz pe gentoc'h ouz ar Vretoned ?
« Red eo derc'hel beo hor gwiskamanchou, hon arzou pobleg, hon dañsou. »
Ha perag ?

« Ablamour ma 'z int bet pinvidigezioù hon tud koz ? » Evid meur a hini n'eus aze nemed eun abeg dister, mad awalc'h evit ma vefe savet eur mirdi kaer evit reseo seurt pinvidigezioù a-wechall. « Ablamour ma 'z int hon herez broadel ? » n'eo ket c'hoaz moarvad eun abeg dijiptot rag n'eus ano ebet c'hoaz eus an den, eus an den a hirio. Herezioù a zo, boazamañchou, a zo, hag a vefe mad o zeurel dreist ar penn mar dint eur skoilh evid tud an amzer vremañ war hent o diorroadur speredel pe war hent o zilvidigez.

Beza koz, beza deuet d'eomp digand hon tud, setu aze perzioù hag en deus eun dra dreizañ e-unan, n'eus ket enno peadra awalc'h evit barn an dra e-keñver an dalvoudegez en deus evid an den a-vremañ.

Daoust ha diskouezet hon eus d'an dud ar priz o deus, bremañ c'hoaz evidomp, evid hor c'homportamant a-vremañ, an dra-mañ 'n dra deuet davedomp eus an amzer dremenet ?

N'eo ket awalc'h c'hoantaat e vefe gwir eur menoz evid ma vefe gwir da vad ; n'eo ket awalc'h gwaranti eur menoz evid ma vefe kredet gant an holl. *N'eo ket awalc'h d'eomp kaout da zont d'hon heul Bretoned a galon hag a zantimant : Bretoned a skiant hag a spered eo a rankomp da zevel.* Anez e vezo skubet buan, gand an avel-dro kenta, ar garantez hon devo hadet evid hor bro.

Arabad kennebeud e teufe ar garantez-vro, ar garantez evid hor c'henvroiz ha kement a aparchant outo, d'hon dalla. N'eo ket mad penn-da-benn kement a zo breizeg ; n'eo ket fall penn-da-benn kement n'eo ket breizeg. Arabad eo d'eomp dismegañsi nag argas diouzomp kement a zeu d'eomp eus diavêz bro ; tra pe dra a c'hellfe, n'eus douetañs ebet war ze, hor pinvidikaat ; o argas a vefe ober *gaou ouz ar Vretoned*.

Gouennou loened ha gouennou drevajou a zo ha n'int ket breizeg a orin hag a zo bremañ eur binvidigez danvezel braoig awalc'h evid ar Vretoned. Na zerromp ket dor hon ti ouz kement tra n'eo ket ijinet ganeomp, war zigarez — ha netra ken — ma teuont d'eomp eus an diavêz ; roomp plas, en hor buhez broadel da gement a zo talvoudus evidomp. Diouz hon tu ni a roio ivez tra pe dra d'ar broadou all.

Ni hag a gred e Breiz — eur ger evid lavared ene ha pinvidigezioù a beb seurt hor poblad — hag er Vretoned, eul labour bras a jom ganeomp da ober : klask eun diazez startoc'h starta d'hor menozioù ha d'hor c'hredennou, embann neuze ar perag hag ar penaoz anezo, embann dre gomz ha dre skrid... gounid a raimp kalon hor c'henvroiz, gwelloc'h c'hoaz, sperejou hor c'henvroiz.

Bretoned a galon a zo mad. Gwelloc'h c'hoaz Bretoned a spered. Gwelloc'h c'hoaz eur galon domm hag eur spered lemm e servij Breiz hag ar Vretoned.

V. FAVÉ.



An U.N.E.S.C.O. en deus embannet eul levr, savet gant an Tad Congar da zisplega menoz an Iliz dirak kudenn ar gouennou-tud skignet dre ar bed : « *L'Eglise et la question raciale* ».

Talvoudus eo d'an holl, ha kennerzus evit ar re a stourm da virout ha da greski pinvidigezioù sevenadurel o fobl, — o 'n em c'houlenn a-awechou ma n'emaint ket o labourat a-enep an unaniez gourc'hemennet gant Doue —, anavezout soñj an Iliz war eur gudenn ken pouezus.

Setu, tennet eus klozadur oberenn an Tad Congar, eun nebeut linennou a ziskouez e berr gomzou penaos n'eus ket a enebiezh etre unaniez an denelezh, evel ma 'z eo komprenet ha kelennet gant ar Feiz, ha liesdoare ar gouennou-tud :

« L'Eglise n'est pas raciste, elle est la contradiction même du racisme : elle est l'unité de la famille humaine, mais une unité qui n'abolit pas les diversités, qui se constitue d'elles, bien plutôt, parce qu'elle est *Catholique*... »

« ...Le principe transcendant de l'unité humaine doit toujours s'appliquer, certes, mais il n'abolit pas les structures culturelles. Tous les hommes sont foncièrement égaux, et cette égalité se traduit dans celle des droits naturels primaires, ceux qu'on résume dans les mots : dignité de la personne humaine. »

Pa zigure an noz

Pa zigure an noz war aochou Treompan
Pet gwej hon eus hon daou, gant bugale vihan,
C'hoarzet a-bouez hor penn, huñvreet awechou,
O welet o c'hestell freuzet gant an tonnou.

Pa zigure an noz, pet gwej va mignon ker,
E traoñ eun ilizig karget a zioulder,
Ni ginnigas d'ar Mestr, penn da benn, hor buhez,
O soñjal gant dudi e deiz ar velegiez.

Pa zigure an noz, dec'h, eus kern eur menez,
Me wele en dremwel, o skedi, Molenez,
Evel eur berlezenn, en eur gouriz arc'hant,
Da enezenn vihan, o mignon, nag oa koant !

Pa zigure an noz, an heol en eur ziskenn
Am lake da soñjal oa maro da viken,
Ar vuhez a wechall, 'vel ma sankfe er mor :
Unan kalz santeloc'h eyidomp a zigor.

Mignon, nag e ve brao, pa zigorfe an noz,
Gwelout hor c'horfou paour eus dor ar Baradoz
Astennet en dachenn edomp o labourat,
Dre ma lavarfe d'eomp mouez karet hon Tad :

« An ero bet trempet gant gwad ar verzerien
A zougo frouez puilh ! Sevel ray beleien
Niverus en ho lec'h. E douar Breiz-Izel
Morse na c'hell mervel ouenn an Ebestel. »

Ha ni hon daou, mignon, eurus en Neñvou,
A bedo evita ! Ni a deuy awechou
Da varvailhat hon daou, da zor ar Baradoz,
Evit gwelout an Eost pa zigure an Noz.

B. E.



Endro da Vleun-Brug Landivizio

*Bleun-Brug Landivizio a-sach evez an holl war gavell ar Bleun-Brug,
ha war ar vro en em led tro-dro d'ar c'havell-se.*

*Evel-se, anoiou tud, aet da anaon abaoe pell 'zo a ziwan en hor
spered ; tud hag o deus roet harp ha skoazell d'an Aotrou Perrot da gas
endro ar Bleun-Brug ha skrivet meur a bennad er gelaouenn a rene :
Feiz ha Breiz.*

*E-touez an anoiou-se lakomp er penn kenta Mari-Anna Abgrall hag
he daou vreur beleg : ar Chaloni Abgrall, ken brudet en eskopti-mañ
dre e skridoù pouezus war ilizou kaer Breiz-Izel, hag an Tad Abgrall,
misioner, a zo bet skrivet e vuhez gant an Aot. Chaloni Perrennès. —
Warlerc'h an tri ano-mañ, lakomp Glaoda 'r Prat (Pluenzir), bet mestr-
skol gristen e Landi e-pad 23 bloaz.*

*Laouen e vo pep hini, o lenn amañ ar pezh a skrive an Aotrou Perrot
divarbenn ar Vretoned-mañ.*

Mari-Anna Abgrall

Eun tiegez war ar mêz, kuzet e-touez ar gwez tost da vourg Lambaol, e-ki-
chen Landivizio, Kerloarec e ano...

Eno eo bet ganet d'ar 16 a viz Meurzh 1850, Mari-Anna Abgrall, merc'h da
Lan ha da Vari-Jan Gwillou.

Ouspenn ar skol vat a gavas er gêr gant he zad, he mamm, he zontoned hag
he zintined koz, e voe henchet war dachenn ar brezoneg gant he breur bras,
Yann-Vari (ar Chaloni), ha gant he breur bihan, Yann-Fransaïk (ar misioner).

Yann-Vari Abgrall ganet e 1846, beleget e 1870, a varvas dean chaloneid iliz-
Veur Kemper d'an 10 a viz Mezeven 1926.

Araok ar bloaz 1905 Mari-Anna n'he devoa skrivet nemet diou' son : Unan
da luskat ar vugale : « Pa oan em c'havell bihanik » hag hini « Ar c'hemener »
bet moulet war « Herminig Breiz », er bloaz 1895.

D'an 12 a viz Gwengolo 1905, pa voe savet gouelioù kenta ar Bleun-Brug,
e kastell Keryann, den ehet ne voe laouenoc'h eget Mari-Anna Abgrall hag he
daou vreur beleg.

Paotred vihan Sant-Nouga, dibabet da ginnig bodou brug d'ar re a oa
deuet d'ar gouel a gane :

**Kaer eo bleun-brug hol lanneier,
Hejet dihejet o c'hleier :
Kaeroc'h eo c'hoaz en hor genou,
Soniu seder hor c'hentadou.**

Ar pezh a ziskoueze e oa savet gouelioù Keryann dreist-holl en enor d'ar
brezoneg ha d'ar c'han.

Da Nedeleg warlerc'h, Mari-Anna a zigasas da baotred vihan ar Bleun-
Brug eur gartenn eus kalvar Lambaol, gant ar gwerziou koant-mañ warni :

**« Da baotred vihan Sant-Nouga,
« Peb a bok start d'o c'halanna.
« Ha bennoz ar Mabig Jezuz
« Ma vint bepred fur hag eürus. »**

Er bloavezh warlerc'h pa voe roet prizioù evit ar gwerziou koz a bennaoued
hag ar gwerziou nevez a zaved, dastumadenn Mari-Anna Abgrall eo he devoe
ar priz kenta : priz an ao. 'n *Eskob Dubillard*.

D'an deiz kenta a viz Here 1906 he breur bras a skrive d'in kement-mañ :
« Va c'hoar a zo deut dec'h da Gemper d'am gwelet ; araok diblas eus Kerloarec he deus resevet he friz. Foughe bras a zo enni, o veza bet da genta en eur seurt abadenñ ».



He breur bihan, *Yann-Frañsaik* a voe ganet e 1854, ha beleget e 1878. Goude beza bet kure e Santez-Kroaz e Kemperle ez eas da brezeg ar Feiz d'ar broiou pell, e Bro-Annam, el lec'h ma chomas 42 vloaz. Morse ne c'hoanteas dont ac'hano d'ober eur bale d'ar gêr.

« Gwelet va Breiz endro, emezañ, a vije bet awalc'h evit lakaat va c'halon da ranna. »

« Kaer eo ar vro-mañ, a skrive c'hoaz, met dreist an holl draou kaer a welan, e lakan korn an oaled e Kerloarec, gant mamm azezet war he c'hador ha ni tu ha tu d'ezi, hag ar vugale pelloc'hik, trouz ganto leiz ani ti. »

Pa welas du-hont e Bro-Annam, gwerzioù kenta he c'hoar vras, e welas pebez pluenn aour a oa en he dorn. Ne roas taol ehan ebet d'ezi, kêñ he gwe-las tag da skriva a-zevri.



Betek neuze, Mari-Anna n'he devoa graet nemet sikour he zad hag he mamm en o c'hozni, ha rei dourn d'he breudeur ha c'hoarezed da sevel o bugale...

Pa ne reer nemet ober vad, penaos ne vefed ket laouen, ha pa vezer laouen, penaos ne ganfed ket ? Setu ar pezh a reas ar c'hoar vras.

Mari-Anna he deus kanet.

Kanet he deus he Doue hag he Breiz, nann evit beza meulet, met evit meuli, evel al labous a gan e sioulder ar maezioù...

Ha seul-vui e kane, seul vui e breur bihan a boueze warni evit ma kanje muioc'h c'hoaz...

E-pad 25 Mari-Anna a skrivas, hag he skridou a rae dudi lennerien « *Feiz ha Breiz* ».

Evel he mamm, ha mamm-goz hag he moereb koz, Mari-Anna a oa eur Vreizadez Penn-kil-ha-troad, hag eur gristenez eus an dibab. Eur vaouez eñ ha dilorc'h a gar ar brezoneg, evel ar brasañ teñzor deuet d'ezi digant he zud koz...

Chom a eure e Kerloarec betek ar bloaz 1910. Neuze, pa zeas he breur-kaer, Yann Kousker, war laezioù, gant e dud, e teuas da chom da vourc'h Lambaol, war hent Landivizio.

Peurliesañ, he skridou a zo diwanet, steuenn ha komzou, en he spered. Awechou koulskoude, ar steuenn a zo roet d'ezi gant he breur bihan, evel : « *Al laouenanig hag ar vouch'ig-ruz* », pe gant ar breur bras, evel « *Ar roue Grallon hag an Doctor Laennec* ». Awechou all he deus he c'havet e skridou gallet, evel : « *Ar Gornandoned diweza* ». Met ker mat e oar gwiska he steuennou ma n'oar ket evit nac'h e ro d'ezo holl, eur stumm eus ar re vreizeka.

Klevet ho peus bet lavaret :

« Eur bod skao

« Pa vez gwisket a vez brao. »

Mari-Anna a ouie gwiska he steuennou a zoare, ha setu perak e oa eur vestrez skrivagnerez.

Petra 'zo kaeroc'h, eme he breur bihan, eget ar gwerzioù-mañ savet gant c'hoar vras :

**« Lakit en hon liorzou bep bloaz kalz a vleuniou,
« Ha da gutuilh anezo kalz a vugaligou. »**

Siouaz ! ar gozni a deuas ha d'e heul ar c'hleñved.

An Ao. chaloni Abgrall, skrivet gantañ e levrioù kaer diwarbenn ilizou Breiz : « *Livre d'or des églises de Bretagne* » a varvas d'an 10 a viz Mezeven 1926. D'an 19 a viz Gwengolo 1929, ar breur bihan an Tad Abgrall, a varve ivez e Xa-Doai, e Bro-Annam.

O koll he daou vreur beleg, Mari-Anna he doa kollet he harpou gwella.

Tri miz goude, d'an 8 a viz Kerzu, e kimiade diouzin evelhenn :

« Na c'hedit mui netra diganin evit « *Feiz ha Breiz* ». Re goz oun bremañ. D'ar re yaouank eo labourat d'o zro. Met me 'soñj emañ ar brezoneg kaer o vont da vervel evel an traou kaer all, siouaz ! Ne glever mui komz nemet galleg saout. Kenavo, Aotrou Perrot, bennoz Doue d'eoc'h ha buhez hir da « *Feiz ha Breiz* ».

« Pa glevoc'h e vo maro Mari-Anna Abgrall, lavarit eur bedennig evit ar Vreizadez ho mignonez koz. »

Tri miz goude, d'an 6 a viz Meurzh 1930, ar c'hoar vras a varve d'he zro. Emañ bremañ o tiskuiza, e bez he zud, e bered Lambaol.



D'an 9 a viz Here, er bloavezh warlerc'h 1931, « *Feiz ha Breiz* » a lakeas ober eun devez pedennou eviti hag he daou vreur beleg, e Lambaol.

An Ao. Trussier, person Kastell, a ganas ar servich bras hag an oferenn-bred. An Ao. Arc'heskob de Guébriant a reas meuleudi an tri Abgrall hag a ganas evito al *Libera*. Eus an iliz ez ejod d'ar vered da skuilha dour benniget war bez Mari-Anna, goloet a vleun-brug.

Goude lein, e-pad ar c'hoariadeg graet gant paotred Scrignac ha Lambaol, e lennis « *eur baourez eürus* », evit rei da c'houzout da Lambaoliz pebez koll e oa bet evito, maro ar vouez koz ha didrous a welent o vont hag o tont en o zouez, ha ne oa anavezet betek neuze, evit beza ar spered kaer ma 'z oa, nemet gant ar re a lenne « *Feiz ha Breiz* ».

Y.-V. PERROT.

An Ao. Perrot a venne moula en eul leorig skridou Mari-Anna Abgrall. Al leorig a vije anvet « Gwiniz hepken », hervez c'hoant an Tad Abgrall.

Ar skridou-se a zo bet roet d'eomp gant ar skeudennou koat kizellet e beuz skrignag, gant Xavier Haas, Doue r' e bardono.

Mar plij gant Doue, al leorig-se a laouenaio c'hoaz kalonou ar Vretoned.

Glaoda 'r Prat

(1875 - 1926)

Ganet e oa bet Glaoda ar Prat d'ar 25 a viz Genver. Graet e veze Glaoda anezañ rak Brestad e oa, Leonard eta hag e bro Léon, Claude a zo Glaoda. Ez yaouank ez eas da jom da Blougastel-Daoulas ha setu perak ez eus blaz brezoneg ar vro-se gant e oberou. Evel marvailher, Glaoda n'en deus ket bet e bar, a lavare Y.-V. Perrot en e bennad kañv da Glaoda e Feiz ha Breiz 1926.

Evidon, da vihana, Eostik Kerinek a zo da veza lakaet araok Glaoda evel marvailher, e peb stumm.

Ne gontin ket buhez Glaoda, taolennet m'eo bet war *Feiz ha Breiz, Arvorig* (1926, p. 124) ha *Bardes et poètes nationaux*, Le Mercier d'Ern.

Mervel a reas e Angers d'an 13 a viz Ebrel 1926 ha beziet eo bet e gorf e Kermaria Sulard. War groaz e vez e voe douget ar gerioù-mañ : « Amañ eo

beziat Klaoda 'r Prat, mestr-skol kristen. » Mat e vije bet dougen ouspenn : « ha breizad ». Mat e vije bet dougen ive : « Pluenzир », e ano skrivagner.

E bennadou niverus e *Kroaz ar Vretoned, Feiz ha Breiz, Ar Vro, Le Pays Breton, Almanagou K.B.B.* ha kelaouennioù all a ziskouez n'eo ket bet piz Glaoda gant e bluenn. Dir kalet 'oa anezi rak eur bern oberou a zo deut diouti. Ar re genta anezo a zo berniet en eul levrig talbennet Klaoda — Claude-Marie Le Prat — « *Mouez reier Plougastel* » Sant Brieg Prud'homme, 1905, in 12, VII, 134 P. Barzonnegou holl nemet eun danevell. Eun daolennig eus ar gerioù diêsa a zo diwez al levr. 2000 skouerenn anezañ a zo bet moulet. An darn vrasa a veze roet da vugale ar skolioù evit o frizioù. Da baeron al levrig Glaoda a gemeras an Aotrou Dubourg, arc'heskob ar Vretoned, lorc'h ennañ da ziskleria, e kentskrid eul levr all, ne oa nemetañ a eskob e komz brezoneg.

Y.-V. Perrôt a voe da baeron da « *Marvailhou ar Vretoned e tal an tan* ». Kontadennou a beb seurt, koz ha nevez gant Glaoda ar Prat, barz Plougastell skeudennet gant Th. Burnel ha Job ar Mouelik, kelenner e Landivizio. — Sant-Brieg ; E ti Prud'homme, levrier, 1907, in 12, 149 p. — Poltred Glaoda a zo e penn al levr. Kentskrid kure yaouank Sant-Nouga, brudet ken yaouank ; a zo e brezoneg a c'hellit kredi.

E brezoneg ive kentskrid J. Dirlem ar Braz da « *Nozvezioù an Arvor* » — Ti moulerez Sant Guillerme, 27 Bali Charner, Sant Brieg, 1909, in 12, VII, 175 p. Dirlem a oa mestr-skol e Guimilio d'an ampoent, kenvreur eta hag amezog da Glaoda, skolaer e Landivizio.

Barrekoc'h war ar vicher ez eo Glaoda gant e « *Rimadellou brezoneg* » trede levr marvailhou evit ar Vretoned, gant Glaoda ar Prat « *Pluenzир* » (da genta Doue, Breiz Izel goude hag he Yez ive). Ti moulerez Sant Gwilherm, Sant Brieg, 1911, in 8, 172 p. Al levr-mañ a jomas dihaeron pe gentoc'h Glaoda a voe e unañ paeron e vugel dre rolla e oberou war ar bajenn genta. Renket en deus 14 anezo bet moulet ha daou war ar stern.

Goudeze e voe moulet « *Pevare levr marvailhou evit ar Vretoned* ». Moulerez ar Bobl, Keraez, in 8, 254 p., 1914 ha skeudennet gant Le Guennec hag Hainaut.

Glaoda a savas ive pezioù-c'hoari : « *Buhez Arzur a Vreiz* » trajedien e pemp arvest, in 12, 165 p., Gwened, moulerez Lafolye, 1908.

« *Trubuilhou an aotrou Gargam* » pe torrou-penn an deiz kenta 'r bloaz. Pez-c'hoari fentus e daou arvest, in 16, 38 p. Sant Brieg, moulerez Sant Gwilherm, 1909.

« *An teir c'had hag ar mevel laer* » daou bez farsus dastumet adgwelet ha reizet a nevez. Sant Brieg, moulerez Sant Gwilherm, in 16, 45 p., 1909. An diou oberennig-mañ, a ouezit, a oa diw ijin ar Breur Constantius.

« *Kentoc'h mervel* », darvoud c'hoarvezet epad an Dispac'h, 3 arvest, Redon, Imprimerie Bouteloup, in 8, 66 p., 1911 (gant tonioù).

« *Chomit er gear* », darvoudou c'hoarvezet gant eur Vretoned aet da glask fortun e Paris. Redon, Imprimerie, in 8, 1913.

A beb seurt traou a religion a zo bet skrivet gant Glaoda, re vihan ha re vras ha va roll dre-ze a hellfe beza diglok rak lod a zo dizano ; an darn vuia a zo divlavez : « *E berr gomzou* », « *Petra eo Trede-Urz Sant Fransez* », « *Deuit holl davet Sant Fransez* », « *Difennour bihan ar religion* », « *Levrig-dourn Trede Urz Sant Fransez* » anvet ivez Urz ar binijen evit tud ar Bed, Brest, Moulerez Ru ar C'hastell, 1912 ; in 18, XI, 428 p., « *Sonjennou devot* evit pep deiz eus ar miz savet dreist-holl evit ar re a zo e trede Urz Sant Fransez », Ar Goazioù, Montroulez, 1913.

Ouspenn-ze e kaver follennou distag bet aozet gant Glaoda : « *Kanaouenn ar skolaer, Kanaouenn ar Vran, Son paotred Landi* ».

Arabat chom heb lenn « *Buhez Jenovefa a Vrabon* » skeudennet gant an dimezell O. De Villers, Emgleo Sant Iltud » moulerez ru ar C'hastell, Brest, 1926, in 13, 97 p. Lemmoc'h eo e bluenn el levr-mañ.

Lezirek eo bet Glaoda goude ar brezel bras. Perak ? Pried a gemeras e 1916 : eur varzezh koulskoude, Loeiza Charran hec'h ano o chom e Kermaria Sular. Houmañ a genlaboure e *Kroaz ar Vretoned, Ar Vro* (1905, 6, 7, 8). Lazet e voe gant eur c'harr-tan e Lannuon e 1934. He mortuach a gaver war *Breiz*, 4 a viz Meurzh 1934. Relegou an daou bried a zo bremañ o tiskuiza e bared Kermaria.

Glaoda ar Prat a oa bet laketa war roll an Académie bretonne a oa anezi gwechall, war ar paper da vihana. Setu perak e voe gouestlet d'e eñvor gant Emil Ernault « *Mojennou koz ha nevez Barz ar Gouet* ».

Meulet eo bet e gwerzioù brezonek gant Anatol ar Braz e 1914 :

L. L.

Mil bennoz d'ec'h-tu, Klaoda 'r Prat !
C'houi oar kontañ ha kontañ mat
Marvailhou kri pe dereat,
Marvailhou berr, marvailhou hir,
Gant pluenn aour ha pluenn zir
Ene hon bro, ene hon gouen
'Neus c'houezet ennoc'h e awen,
O mab douar ar gonterien
Lec'h e tiwan ar marvailhou
'Vel ar c'hanab el logellou.
Breiziz a viskoaz 'zo bet tud
Da drei brao pe farz pe vurzud
Breiz 'neus eun teod ha n'e ket mud :
Mont a ra ganti, dous pe zall
Traou ar bed-mañ, traou ar bed all.
C'houi 'mañ ennoc'h spered Breiz koz.
Kab da gonta ha de ha noz,
Heb ma ve biken fin d'ar gaoz.
Kontet 'ta, konter galloudek
Losket dour « ar Prat » da redek.
An dour-se a zo dour mammen,
A zav glazur dre ma tremen.
'Barz er galon evel en draonien
'Neus dour a ruhez nemetañ.
Dalc'het, marvailher da gontañ !
'Vit ar re vihan, ar re vras,
Kontet, kontet ha kontet c'hoaz...
Den n'ho chilaou 'vel « Ar Braz »
'Neus tremenet e amzer well
O chilaou kontañ Breiz-Izel.

ANATOL LE BRAZ.



Brezoneg flour an Ao. Perrot

T'ennet eus ALANIG AL LOUARN pezh c'hoari farsus savet gant an Ao. Perrot ha bet c'hoariet evit ar wech kenta e Bleun-Brug Keryann e 1905.

EIL DIVIZ

(Alanig al Louarn, alvokad dilabour, ha Primel, e vevel.)

ALANIG (o tont en ti)

Evelse, Primel gant a ri
Bez kempenn, paotr, war va listri
Evelato war zigarez
Ober onezo traou nevez,
Ne da ket da re o spura
En aon na deufez d'o uza.

PRIMEL

Bezit dinec'h, Aotrou Alan
C'hoari 'ran dresa ma c'hellan,
Ha ma n'uzfen ket va dilhad
Muioc'h eget ho listri plad,
Ne vefen ket o vont e truilhou
Evel m'emaoun bremañ, siouaz !

ALANIG

Mard' eo mat beza a zoare
Ker mat e kavan e vefe
Etre mevelien ha mistri
Eur c'hemm bennak ebarz an ti ;
Ha ma vefez gwelloc'h gwisket
Da vestr ganez a ve trec'het,
Rak e zilhada, 'vel a welez
Ne vezont ket didoull bemdez.

PRIMEL

Bras-bras e prezegit, aotrou.
— Dreist-holl evit ho kodellou
Mat eo laez dous, mat eo laez treñk
Mat da bep hini chom en e reñk,
Evelato ne gredan ket
E c'hellfenn beza abaget
Hag e lakafen eur pezh arc'hant
Da brena danvez gwiskamant
Met eus a belec'h e lakin ?

ALANIG

Te n'out nemet eun avoltin
Ha teod kel lampr ha da hini
Biskoaz n'eus bet ouz va strani.
N'eo bet echu da vloaz ganet
Hag e karfez beza gopreet ;
C'hoant az pefe war a welan
Kaout da bae araok rei da boan.
Ha koulskoude em eus klevet

Va zud gwechall o lavaret :

« Dibaot al labour a vez mat
« Pa vez paet araok m'eo great ».

PRIMEL

Ganeoc'h 'ta neuze, pa reer kont
Trizek da zousenn a respont.

ALANIG

Trizek da zousenn, ha perak ?
Piou her gwelas eun tu bennak ?

PRIMEL

Piou her gwelas ? C'houi eo her gra
O komz evel a rit brema
Daoust ha n'eo ket da c'houel Mikeal
E teus davedoc'h e leal
Warlene da genver hizio ?
Emaoun amañ 'ta bloaz a zo ;
Ha ma fell d'eoc'h e kendalc'hfen
D'ober ho kegin, e karfen
Ho kwelout o rei, n'eo ket ta,
Va goprou koz d'in da genta.

ALANIG

Sell, ya vat, gwir a levere
Ne zontjen ket e pe zervez
Edomp hizio. — Nann va Doue
Dinec'h e oan, ha koulskoude
Deiz gouel Mikeal hag an Ankou
A ra kalz a jenchamañchou.

N'eo ket da laret e c'hellfen
Rei d'it diouztu da wenneien,
Rak gouzout a rez difazi
Abaoue m'emaout e va zi
Ne ran ket aour gant morzoliou.

PRIMEL

O ! Anat eo d'an holl, aotrou
Rak ne gouezas biskoaz an aour
E godell eun den dilabour
Gwechall, bep prosez a veze
An holl amañ ho koulenne.
Ne vezit ken diwar an dour
Hag an holl ho lez dilabour :
Dibreder e vezit bemdez,
Petra dal ho kousiegezh ?

ALANIG

Meur a gudenn am eus ganti
Dirouestlet da veur a hini ;
Ha pa c'hellan en em lakaat
War va micher da labourat
Ne gredan ket e c'hellfed kaout
Eun alvokad eus va galloud.

PRIMEL (outan e-unan)

Ya ! da droada gevier, hep mar
N'eus ket ho par war an douar.

ALANIG

Met bremañ an dud a fura,
Ha dre-se ni goll hor bara.
Met fiziomp en amzer da zont
Gwellaat a ray an traou da vont.

PRIMEL

O ! gant esperañs ha dour yén
E vez maget meur a zén.
Siouaz d'eoc'h ; n'oun ket eus ar re
A vez bevet ken diviz-se,
Ha n'eo ket gant komzou goulou
Eo e vez stanket an toullou
A gresk e va dillad bemdez,

ALANIG

Ar wirionez a zo ganet
E truilhou emamp o vonet.

PRIMEL

O vonet ? met aet eo ez omp
Penn kil ha-troad, ma z'eo mez d'eomp.

ALANIG

Gortoz, me oar ar pezh a rin
Evit lakaat d'an traou-mañ fin.
Mont a ran va-unan e feac'h
Da droial war ar marc'halleac'h :
Ar foar a zo, ha marc'hat mat
Dilhad a gavin er marc'had.

PRIMEL

Kaout a reoc'h n'eus forz pegement
A zilhada nevez a bep ment
Mezer a bep seurt d'ho tiviz
A bep seurt liou, a bep seurt giz :
Met araok gallout kaout ho c'hoant
E rankoc'h diskouez hoc'h arc'hant.
Ho yalc'h dilaset a vezo

Met anezi seurt ne gouezo
Rak eus eur zac'h diaes eo tenna
Pa ne laker netra enna.

ALANIG

Daoust ha te 'zo bet o sellet ?

PRIMEL

Gouzout a c'heller hep gwelet.

ALANIG

Mat ! n'eo ket pemp biz ' zo aze
Ma ne zizroan dizale
Gant va samm a zilhada nevez
Evidomp hon daou, va faotr kez :
Mezer penaos a fell d'it kaout ?
Lavar dillo, me rank gouzout.

PRIMEL

Ar pezh a c'hellloc'h da gaout, mestr :
Ne zibab ket an neb a brest.

ALANIG

Sae war gorre ha sae dindan
Az peus ezomm war a welan
Gant eul lavreg war ar marc'had
Evit beza gwisket dereat.
Evidout diou walenn hanter
Hag evidoun teir pe beder,
Rak eus va zu hag em befe
Dilhad nevez hag a zoare,
Netra m'oar, vat, sur ne gollfen
Rak an dilhad a ra an dén.

PRIMEL

Ha piou an diaoul, da vihana
A c'hell presta d'eoc'h er gêr-ma ?

ALANIG

N'emañ ket c'hoaz en da bater
Gant piou ez an d'ober afer.
Ar pezh ' zo sur, bez am bezo
— Ha deiz ar Varn me o faeo —
Dilhad nevez eus ar c'haera,
'Vit bennoz Doue ha ken tra.

PRIMEL (en eur c'hoarzin goap).
Gwelet e vo !

ALANIG

Gwelet a ri.
Da c'hedal, diouall mat an ti.



BREIZ E FATIMA

Digant an Ao. Breton, teñzorier ar Bleun-Brug, hon eus bet ar pennad-mañ goude e berc'hirinaj e Fatima. Bennoz Doue a lavaromp d'ezañ evit ar blijadur-se, hag evit beza sonjet er Bleun-Brug, e-harz treid Itron Varia Fatima.

Goude beza tremenet an noz e Figuerra da Foz, porz-mor eus ar Portugal, hon eus kemeret an treñ da 6 h. 30 evit Fatima.

Leun eo an henchou gant ar berc'hirined.

Dalc'hët e vez ar c'hirri a zav pellig diouz Fatima. Ar rest eus an hent a vo graet war droad.

Familhou a-bez a vale en eur bedi. Merc'hed e-leiz a zougenn war o fenn paneradoù boued.

War-dro 8 heur emaoamp digouezet war dorgenn Fatima. Mont a reomp da genta d'an iliz.

Fatima a zo war an uhel, en-dro d'ezi parkeier labouret darn anezo.

Eus ar geriadenn goz ' ne chom mui netra. En he lec'h emañ bremañ an iliz vras gant an « esplanâd ». Lavaret ez eus bet d'eomp ez eus dindano 56 devez arat.

A bep-tu d'an iliz ez eus ospitaliou evit reseo ar re glañv.

A-bap tu d'an hent, gourvezet, hag endro d'ezo pallennoù, ez eus eur bern tud, kousket pe hanter gousket : ar re a zo bet en oferenn hanter-noz hag e prosesion ar goulou. Re all a zo oc'h aoza o dijuni, rak e Fatima n'eus ostaleri ebet.

War an « esplanâd » el lec'h m'eo bet en em zikouezet ar Werc'hez, emañ chapel an apparisioñnoù.

C'houec'h kwech eo bet en em ziskouezet eno ar Werc'hez d'ar vugale.

Ar wezenn ma veze ar Werc'hez a-us d'ezi, ne chom netra anezi ken. Evit merk'al al lec'h ez eus eur peul mein, a vez laket warnañ skeudenn ar Werc'hez, da geñver ar pelerinachou bras, d'an 13 eus pep miz, azalek miz Mae da viz Here.

Evel e Rumengol, ar belerined a stok outi o chapeledou hag o medalennoù...



Da 10 h. an « esplanâd » a zo leun-kouch a dud ; eur mor a dud a gwirionez evel n'em beus morse gwelet em buhez.

Neuze e touger an Itron Varia diwar he zron betek an iliz, war eur c'hra-vaz leun a vleuniou.

Er brosesion e weler an holl gevredigezioù katolik eus ar vro ha strolladoù parrezioù ganto bannieloù, hag evit kloza, ar veleien hag an eskibien. Renet eo ar gouel hirio gant kannad ar Pab er Portugal.

E-keit-se, ar mor a dud a hej drapoioù bihan pe mouchoueroù gwenn. Youc'hal a reont a bouez-penn o meuleudi d'ar Werc'hez. Mammou a zo hag a sav o bugale vihan war bouez o divrec'h evit o c'hinnig da Vamm Doue.

Neze, kantit Fatima, kanet gant an holl, a dregern dre holl.

Ar Werc'hez a dremen dre douez an dud klañv, renket a bep tu d'an Aoter vras.

Pebez taolenn dudius neuze dirak hon daoulagad !!



An oferenn-bred, kanet gant eun eskob, a zo eun daolenn a feiz estlammus : eur feiz birvidik, entanus.

Goude an oferenn e vez douget ar Sakramant meulet ra vezo dirak ar re glañv, e-keit ha ma vez graet pedennoù a vouez uhel evel e Lourd. Warlerc'h ar brosesion-se, e vez roet bennoz ar Sakramant.

Goude e vez kaset en-dro skeudenn ar Werc'hez war ar peul maen, el lec'h m'edo araok an oferenn-bred.

Ken kaer eo an holl lidou sakr-se ma seblant an holl beza skoet ; darn zoken a weler o skuilha daelou.

Prestik e vez gwelet an engroez o vont kuit. Pep hini a gemer hent ar gêr.

En deiz warlerc'h e lennomp war ar journalioù, ez oa eno 400 pe 500.000 den !

J.-M. BRETON.



AIR MIEDER

Ruz ha reudet e c'houzoug, diskramailh e vruched,
Ar meder, ' hed an dervez ' zo war gorf e roched ;
Ober ' ra d'e falz sotal a-dreuz an ed dare,
Ha ser ober eur sav-kein, eul lemm bep ar mare.

Abaoe ma ' z eo steuziet sked ar werelaouen ⁽¹⁾,
Ha m'o deus ar c'hejer ⁽²⁾ strinket o c'hanaouenn,
Ar meder ' zo daoubleget penn-da-benn an ero,
Ar c'houezenn war e groc'hen, dindan an heol bero.

Dre ma tiskenn ar pardaez eo berroc'h e alan.
E c'houezenn a vo torchet gant kil e zorn ledan.
Evit terri e zec'hed ec'h evo eul lomm dour,
Ha war eun dramm azezet e sell ouz e labour.

Setu medet ar gwiniz, ledet war an douar ;
Er park, e renkennadoù a ra henchou a c'hloar.
« Bennoz eta da Zoue ! A vouskan ar meder ;
« Va gwreg ha va bugale ' c'hello beza seder ».

Met ive nag a labour, nag a zeizioù doanious !
Na brevet eo e zivrec'h, leun a skuizder poanious !
Koun teñval e boan garo, war dost d'eur bloaveziad,
A guz al lorc'h diwanet e kleuzenn e lagad...

Eur pezh kaer ar poanioù pa skrij ar gwennili
En o chase d'ar c'houibu tro-dro d'ar gwrac'hilli ⁽³⁾,
Pa gas tud an tiegez, tad, mamm ha bugale,
Gant eur galon unanet, o bennoz da Zoue.

G.

(1) Ar werelaouen : steredenn ar mintin.

(2) Ar c'hejer : ar c'hilheien.

(3) Ar gwrac'hilli : ar bernioù gwiniz.

Rimadellou bugale

dastumet gant KERLANN

Rimadellou, traouigoù lavaret d'ar vugale pe kanet d'ezo gant o zud, den ebet ne soñj enno... Disterachou, emezoc'h, marteze.

Hini hag hini e seblantont beza dister. Ha koulskoude, me hel lavar d'eoc'h e talvezont ar boan pa vezont laketa en eur gichen.

Enno ez eus danvez, spered, buhez. Kerlann en deus dastumet ar bruzun se. tan-mou anezo d'an nebeuta, met ezomm en deus vije kaset re all d'ezañ. Pebez l'orig brao a rafent. ne gav ket d'eoc'h ?

Ouspenn, an tiegeziou tud yaouank c'hoant d'ezo deski brezoneg d'o bugale a vezo sibouret ganto.

Ac'hanto lenn-erien, kreskit ar bern. Kasit kement a gavoc'h da : Kerlann Keranna, Yerrez (S.-et-O.). — Ha da c'hortoz, lennit amañ warlerc'h eun tañva eus ar rimadellou-se.

*Evit lakaat ar vugale
da lammat war ar varlenn.*

Marc'h Hamon a ya da Vrest
Dishouarn ha digabestr,
Dreist ar vein, dreist an dreñ,
Mari vihan war e gein,
Unan all war e choug,
Unan all war e lost
Da gas eul lizer d'ar post.
...D'ar paz, d'ar paz,
L'an trotig, d'an trotig,
Ha d'ar c'haloup bras,
Ha d'ar c'haloup bras.

Al loened farsus.

Me ' m eus gwelet e Pont-Paol
Daou gi du o planta kaol,
Al louarn oc'h arat,
Ar yér o pigellat
An houldi, dorn ouz dorn
O kaz an toaz d'an ti-forn.

Ar vatezig.

Mari-Janig a blij d'in,
Kalz a labour a ra d'in,
Goro ' r zaout, o c'has er-mêz
Hag o skuiha d'in va lêz.


D'eur c'haz a tont d'ar gêr.

Bichig maeron, pelec'h out bet ?
— En ti all. — Petra ' peus bet ?
— Eun tamm bara ' mann,
Eun tamm bara lêz
Hag ar vaz da vont er-mêz.

Biskoaz kemend-all
N'am boa gwelet en deiz all !
An oferenn d'an abardez,
Ar gousperou da c'houlou dez.



Mammgozig, tad-kozig da be-lec'h maoch o vont Dán



i-liz, da be-di Deut a-sam-blez ga-neomp

Biskoaz kemend-all,
Pevar lagad d'eur marc'h dall,
Pa ' z a gant an hent e wél eun tu,
Pa ' z eu endro e wél eun tu all
Setu e wél kement hag eun all.

*Da heja ar c'houadur
en eur gregi en e zaouarn.*

Rollit, rollit tu pe du,
Boutou, loerou, loerou ru.
Distoupig, Distoupig,
Margodig, Margodik !

*War pemp biz
eur c'hrouadur bihan :*

Hemañ en deus diskoachet ar c'had.
Hemañ en deus redet war he lerc'h.
Hemañ en deus paket anezi.
Hemañ en deus debret anezi,
Hag hemañ an hini bihan paour
A zo deut da lavaret d'e vamm
Troc'ha d'ezan eur pezh tamm
bara ' mann.

*Echu eo ar foar.
Ar mestr a zeu d'ar gêr
rout e voutou.*

Ar c'hog a lavar : « Deut ar mestr d'ar gêr ! »
Hag ar c'haz : « Mèo, mèo ! »
Neuze ar c'hi : « Atao, atao ! »
Hag ar pemoc'h : « Peuc'h, peuc'h. »

KERLANN.



K E L E I E R

La Messe du Bleun-Brug de Callac.

Le Bleun-Brug du diocèse de Saint-Brieuc, qui s'est célébré cette année à Callac, a été marqué par une innovation d'importance, qui n'est pas restée inaperçue aux yeux de ceux qui suivent nos Congrès de façon régulière. D'ordinaire en effet nous nous contentons soit d'une messe solennelle selon la formule immuable et imposée par la liturgie latine, quitte à agréments l'affaire d'un chant breton avant et après la cérémonie, et même après la Consécration, d'un *Adoromp holl*, repris par la foule, comme la coutume l'autorise chez nous. Ou bien nous célébrons une messe basse, qu'un lecteur commente de son mieux et fait suivre à la foule, bien que celle-ci n'y participe que peu. Si nous chantons des cantiques pendant cette messe, il est assez apparent que ceux-ci ne sont pas adaptés à la liturgie qui se célèbre : nos recueils en effet sont très pauvres de cantiques utilisables pour la messe.

Cependant nous assistons à l'heure actuelle à l'éclosion d'une nouvelle mentalité liturgique : nous désirons suivre de près la messe, nous voulons chanter des cantiques qui nous unissent à la cérémonie au lieu de nous en distraire. Des essais dans ce sens, pas tous dénués de valeur, sont faits en français, et tendent à prendre pied dans nos paroisses.

Il est nécessaire que du côté de la langue bretonne un effort soit fait ; il est d'autant plus légitime que la langue bretonne s'adapte de façon parfaite au chant liturgique en raison même de son accentuation sur l'avant-dernière syllabe, alors que le français accentué sur la dernière, sonne avec difficultés et ne peut se plier au chant grégorien.

Au contraire, l'adaptation de la langue bretonne à la musique grégorienne est facile. L'un des chants utilisés pour la messe de Callac répondait à ce point de vue. A l'offertoire, c'est une traduction bretonne du chant latin de l'ancienne liturgie gallicane : *Christus vincit...* qui a constitué la prière de l'Eglise pour le salut de ses membres et son triomphe spirituel.

Mais il ne s'agit pas seulement d'adapter : des créations sont souhaitables, soit des compositions toutes nouvelles d'après les modes anciens, soit la transposition de mélodies populaires. Le « Vidi Aquam » qui inaugurait l'office présentait l'antienne et le psaume traduits en breton et chantés sur une mélodie toute nouvelle composée par M. l'abbé Goasdoué, directeur de la Chorale de l'Institution Saint-Joseph de Lannion, mélodie simple, au rythme proche du grégorien, et en même temps de caractère très pieux.

Un autre chant breton a marqué la communion. Une antienne sur les paroles : *Allelouia, meuleudi deoc'h, Aotrou, allelouia, allelouia*, était reprise par la foule et alternait avec les versets du psaume 116 : *Kanmeulit an Aotrou...*, interprété par un soliste sur le huitième mode grégorien s'inspirant d'une mélodie populaire publiée par F. Vallée : *Kabusin ar Gwenn*.

Ces trois exemples montrent quelles sont les possibilités de la langue et de la musique bretonne. Ce ne sont que des essais, mais déjà concluants, des schémas de travail, mais aussi une invitation à pousser plus loin et à créer.

Tout cela était possible dans une messe lue (sans diacre et sous-diacre) comme il avait été décidé de la célébrer à Callac. Par le fait même tous les chants en langue populaire devenaient possibles de la part de la chorale, de la foule, ou du lecteur. Celui-ci a évidemment lu en breton les textes de la messe : introit, oraison, épître... Pour chaque partie de la messe, quelques phrases de commentaire en breton aidaient l'assemblée à participer au mystère. Mais l'épître et l'évangile étant une proclamation de la parole de Dieu, il convenait que le lecteur les annonçât de manière plus solennelle : c'est pourquoi l'épître fut lue recto tono lentement, l'Evangile chantée sur un récitatif nouveau inspiré

d'un mode breton ancien ainsi que de l'Evangile en grec. Les gens l'ont écouté avec une émotion visible, dans un silence impressionnant.

Tout cela avait été mis au point à l'avance jusque dans les moindres détails par M. l'abbé Le Floch, qui remplissait lui-même la fonction de lecteur, et M. le chanoine Le Diuron, curé de Callac, qui célébrait la messe et dont tout le monde connaît la compétence dans les questions liturgiques et le zèle pour un culte de Dieu véritable et sanctifiant. Une messe à Callac est une chose vivante, un engagement des fidèles dans le mystère du Christ. Réveiller la foi de notre peuple suppose un effort de notre part. Nous devons faire en sorte que le travail accompli à Callac soit un point de départ et l'aurore d'une rénovation spirituelle et liturgique bretonne.

F. T.

P. S. — Les personnes qui voudraient utiliser les chants présentés à Callac peuvent les demander à M. l'abbé LE FLOCH, Aumônier, Institution Saint-Pierre, Saint-Brieuc. Ils paraîtront d'ailleurs dans le Bulletin du Bleun-Brug de Saint-Brieuc : « Barr-Heol ».



Ar besketerez e Breiz

An Aotrou A. Guilcher, kelenner e Nancy, en deus skrivet, nevez 'zo eur pennad diwar-benn ar besketerez e Bro-Frans. («Noris», kelaouenn a zouaroniez.)

Er bloavez 1953 ez eus bet pesketaet 406.000 tonell etre pesked ha krogeneged (hep konta istr, meskl ha krogeneged bihan).

Setu amañ ar roll eus ar perzier-mor o deus dastumet ar muia :

1. Boulogn : 119.000. — 2. An Oriant : 38.000 t. — 3. Fécamp : 32.700 t. — 4. Konkerne : 26.000 t. — 5. Douarnenez : 20.700 t. — 6. Bourdel : 20.400 t. — 7. Diep : 19.100 t. — 8. Ar Rochel : 15.800 t.

Setu dija 300.000 t., ne jom mui kalz a dra evit perzier ar mor Kreisdouarek.

Ar c'hrogeneged avât (legestr ha grilhed) a vez gwerzet dek gwech keroc'h eget ar pesked ha *Kameled*, d'ezi da zigas d'an douar kant gwech nebeutoc'h a bouez eget Boulogn a gouez enni netra nemet dek gwech nebeutoc'h a arc'hant.

Pell emañ koulskoude warlec'h broioù all a zo :

Bro-Frans : 406.000 t. — Ar Japan : 4.200.000 t. (1952). — Ar Stadoù Unanet : 200.000 t. — Ar Norveji : 1.400.000 t. — Breiz Veur : 1.000.000 t. — An Danmark : 328.000 t.

Aon en deus an Ao. Guilcher ouz al labour destruj a ra ar Besketerez dre chalud e morioù Europa ar c'huz-heol. Seurtou bihan a zo hag a ya war rouesaat hag a renker mont dounoc'h-douna er mor. Setu perak e vo ranket ivez ober bigi-pesketerez brasoc'h gouest da herzel ouz an taolioù amzer. « Amzer da zont ar besketerez a vo moarvat er morioù tomm ». Ouspenn n'heller ket kenderc'hel da goll bep bloaz bigi ha tud evel ma reer e Breiz. Penseou ar bloavez 1954 a zo evidomp eur gentel. Eur paramantour eus Konkerne a zo o lakaat ober eur vag-chalut gant eur glozenn houarn a unneg meudad teoder. Setu digor an hent nevez moarvat da besketerien Breiz.

Ma kresk a vloaz da vloaz ar pouez pesked a vez paket, war vihanaat ez a avat niver ar besketerien hag an dra-mañ a zo eun abadenn all : penaos rei labour d'ar re a jomo war zouar ?

V. FAVÉ.

Brezoneg war ar mor

Setu amañ eur guchennad anioù brezonek — eur frealz o lenn — bet gwelet e porzioù mor hor bro war bagou pesketerezh :

— E KAMELED : « *Kenavo* », « *Ero Dro* », patron Lescop ; « *Cassatao* », patron Lastennet ; « *Rozen* », « *Mab ar Mor* ».

— E DOUARNENEZ : « *Pell euz an Neiz* », patron Jozef Perhirin ; « *Dalc'h Mad Atao* », patron Fañch Kloareg ; « *Friant Braz* », « *Ar Grill* », « *Bijou Coz* », « *Red ar Mor* », « *Kanaouen ar Mor* », patron Guivarch ; « *Ani Bouar* », patron Gloaguen ; « *Ar Poilu* » (sic), patron Hélias ; « *Stereden Vor* », patron Marec ; « *Peoc'h a Labour* », patron Kere ; « *Rouanez ar Peoc'h* », patron Chapalen ; « *Alan Bihen* », patron Bizien ; « *Breiz Atao* », « *Ma Bro* », « *Pod Herve* », patron H. Colin ; « *Rosmeur* », « *Bleiz ar Moriou* », patron Boézennec ; « *Mamm Doue* », patron Blaize ; « *Sant Corentin* », patron C. Colin ; « *Pod Sant Yan* », patron Colin ; « *Sao Breiz* », patron Doare ; « *Fraijou Bihen* », patron Fiagr ; « *Bijou Bihen* », patron Herri Fiagr.

— E KONK-KERNE : « *Ar Vro* », « *Klass Kaye* » (1), « *Biskoaz* », « *Prad an Askel* », « *Mab Iena* », « *Poulgwin* ».

— E POULGOAZEK : « *Lapart Bihen II* ».

— E BEG-MEILH : « *Beg Hir II* », bag Bollere ; « *Kornog* », « *Armen-Guen* », « *Maner ar Mor* », « *Kreisker* », « *Sant Kaourentin* », « *Dalc'h Sonj* », « *Ne flanch* ».

— ER GELVENEG : « *Piron Bihan* », palangrier ; « *Bab ar Pitit* », « *Mab ar Michidour* » (ar micherour), « *Labour a kann* ».

— E SANT-WENOLE-Penmarc'h : « *Mousse Bihan* », patron Bariou ; « *Pood Tine* », patron Le Donge ; « *Ar Malvaod* », patron Yann Gueguen.

— EN INTEL (Etel) : « *Breiz-Izel* ».

— EN ORIENT : « *Rosbray* », « *Stang a Hoat* », « *Salver er Bed* » (chaluter).

— E BREST : « *Ar Saour* ».

— E ROSKO : « *Rosko* », « *Heb-ken* », « *Roch Glaz* », « *Lapous Mor* ».

— E LOKWENOLE : « *Ketao* », « *Hastafo* ».

— E ALJER : « *Mondara* », « *Menhir Braz* ».

— E DAKAR : « *Yann Rouillet* ».

An hini a oar a lavaro c'hoaz...

Kerlann.

« *Jenovefa* », pezh-c'hoari war gan, o kemer e lañs.

D'an dregont a viz Ebrel ez eus bet graet e Kervreiz eun tamm prezegen gant Milik ar Skañv eus Groñvel (Bro Gerne), war digarez lakaat dirak ken-vroiz bodet eno e oberenn nevez : *Jenovefa*, pezh-c'hoari e stumm eur c'hoari-gan (opérette), an hini kenta moarvat da veza bet savet e brezoneg. Modern-tre e vo ar pezh-se. Da heul eo bet klevet Erwan ar Mogn o c'hoari an toniou anezañ war ar piano. Ar « folklore » a zo mat, a lavaras ar prezeger. Ar re yaouank avat a c'hortoz eun dra bennak all, pe e troint da viken tro-dro evel eur c'hi war-lerc'h e lost, hag an dud a skuizo, a-benn ar fin gant ar memes dañsou, ar memes toniou binioù. Ret-mat eo beva gant an amzer o ren, lakaat ar brezoneg da dalvezout evit traou all, modernoc'h. Ha perak ne vije ket lakaet war al leurioù-c'hoari peziou war gan evel ma vez graet er broioù all ? Awenet gant an traou mod koz, ar peziou-se a vezo deuet mat d'ar Vretoned.

Ar strollad c'hoarierien a zo prest. Goude an taol kenta, e Pariz, e raio tro Breiz, rak evit Breiziz eo graet. Piou a lavaro pelec'h mont da c'hoari ?

Skriva da : Milik ar Skañv, Keranna, Yerres (S.-et-O.).

Filmou nevez.

Brittia-Film a zo kroget da rei eur rollad filmou nevez. Anavezet eo bremañ dre holl « Brittia-Film ». Bet eo e pevar c'horn Breiz hag e kerioù bras Bro-C'hall o rei « *Le Mystère du Folgoat* » hag ar film *Bleun-Brug*.

Daou film nevez all o deus savet abaoe : « *Korn-Boud* », ennañ taolennou eus istor Breiz, ha « *Le meilleur de ma jeunesse* » pe bugaleaj Botrel.

Diskouez a ra d'eomp, ar film-mañ, eun doare didroidell, buhez ya'h ar vugale e-kreiz glaster ar maeziou, pell diouz safar ar c'herioù bras. Taolennou kaer a gaver da heul ha meur a hini eus kanaouennoù ar barz brudet. Ma n'eo ket eun taol-micher, e c'heller lavaret ez eo « *Le meilleur de ma jeunesse* », eur film ya'h ha kentelius war meur a boent.

Skol hench.

Eun nebeut tud, bodet e Ploueg-Ar-Mor, d'an 12 a viz Mezeven 1955, o deus divizet, gant Aotre Rener ar Skolioù Kristen Eskopti Sant-Brieg, sevel eur « skol-hench » e Skol Sant-Erwan, e Ploueg.

Eur c'hlas nevez a vo digoret evit ar vrezonegerien a-vihanik, a vezo digemeret evel pañsionidi. Ar c'hallegerien vihahn a vo digemeret ivez, hag a zesko ar Brezoneg evel eil yez.

Eur Gevredigez a raio war-dro mizou ar c'hlas nevez ha gapr he skolaerezh. Eur vodadeg da ziazeza ar Gevredigez a vo graet diwezatoc'h.

An dud a garfe skoazella e stumm pe stumm, pe kas o bugale da Skol Sant-Erwan a zo pedet da skriva d'ar Rener.

Ploueg-Ar-Mor, d'an 12 a viz Mezeven 1955.

Yeun ar Gow, noter e Gouezeg,

Rr Gontez de Rohan-Chabot,

Yann Kadoudal, Boulvriag,

Abad Kalvez, Rener Skol Sant-Erwan.

Buhez an aotrou Perrot.

Emañ erru er-maez eus ar vouterezh, buhez an Aotrou Perrot, gant an Abad Poisson. Evit prena al levr, implijit ar baperne distag a gavoc'h en niverenn-mañ eus Bleun-Brug.

Levriou nevez.

Emañ deut er maez levr Yeun ar Gow : « *E skeud tour bras Pleyben* », gwisket dudius ha skrivet kaer, 226 pajenn en deus, gant geriadur ar gerioù diës evit echui. Bez ez eus ennañ 26 pennad bourrus ha beo enno buhez ar c'horn-bro. Evit kaout al levr, skriva d'an oberour : Y. Le Goff, notaire à Gouézec, C.G.P. 12.668 Rennes. 750 lur war baper ordinal, 1.000 lur war baper kaer.

Dek Sonenn.

Eul levrig dudius all hon eus resevet, skeudennet gant Langleiz : « *Dek Sonenn* » savet gant Roperh ar Mason, Doue r'e bardono. Embannet eo al levrig gant B.A.S. Evit her c'haout, skriva da : Abbé Le Palud, aumônier, Ecole Saint-Joseph, Vannes (Morbihan). War baper kaer : 230 lur, war baper ordinal 180 lur.

Levriou Jos Doare.

Nevez deuet er-mêz e ti Jos Le Doaré, Kastellin : « *Pardons de Bretagne* » gant Florian Le Roy. « *Danses de Bretagne* » ha « *Bretagne aux Légendes* » (la Mer), gant Per Hellas. Levriou eo ar re-mañ hag a rank pep Breizad kaout en e levraoueg. 250 lur ar pezh : Editions Jos Le Doaré, Châteaulin.

Yann Fouéré.

Lez-varn Paris en deus nevez barnet Yann Fouere, bet e-pad ar brezel rener ar journalioù « *La Bretagne* » ha « *La Dépêche de Brest* ». Setu amañ petra ' lennomp war ar « *Progrès* » diwarbenn ar varnedigez-se :

« Par contumace, M. Fouéré avait été condamné aux travaux forcés à perpétuité. Au cours des débats judiciaires qui viennent de se dérouler à Paris, cette fois devant l'accusé, divers témoignages ont été entendus, notamment celui de M. Le Gorgeu, ancien sénateur du Finistère, et ancien président du Conseil d'Administration de « *La Dépêche* ». Finalement le Tribunal a prononcé l'acquittement de M. Yann Fouéré. »



Theodor Botrel bugel, evel ma vez gwelet er film.

(1) Klask kailh = chercher à se battre.

Kanvou

An Aotrou Tenenan Gouriou.

An Aotrou Tenenan Gouriou, beleg, a zo nevez aet da anaon. Ganet eo bet e Kerzent-Plabennec er bloaz 1885, ha savet e Sant-Tonan. Goude e studi e Lesneven, e voe beleget e 1909.

Epad 25 bloaz e reas skol e Kraon (Crozon). Person Eskibien e 1934, Plouneour-Lanvern e 1944, e voe oumounier Leanezed ar Beorien, e Brest eus 1952 betek e varo.

Gloazet e oa bet e Verdun e 1916 ha prizoniet.

Heñ eo a skrive e « Feiz ha Breiz », ar pennadou diwarbenn Istor Breiz, dindan an ano a « Youen an Tour Gedenn », a araok ar bloavezh 1914.

Epad m'eo bet oc'h ober skol, en deus muia ma c'helle, en em servijet eus ar brezoneg en e gelennadurezh.

Eur brezegenn a reas e Bleun-Brug Kastell-Paol war an doare da gentelia ar vugale dre ar brezoneg.

Savet en doa eur yezadur, met n'eo ket bet moulet, siouaz !

Kenderc'hel a reas da skriva e « Feiz ha Breiz ». Sina a ra e bennadou awechoù Tenenan Gouriou, awechoù all T.G.

Goulenn a reomp digant hon Ienerien kaout eur soñj en o fedennou eus ene an Aotrou Gouriou, nevez aet d'ar bed all.

L. L.

An Aotrou Job Cuillandre.

An Aotrou Cuillandre a zo ivez nevez aet da anaon.

Ganet e Molenez e 1881, e kredas da genta e voe galvet da vont da veleg. Mont a reas da echui e studi da Roazon. Eno e voe rener ar studierien vreton e-keit ha ma heulie kenteliou Joseph Loth.

Donezonet kaer, gwerziou a savas bet moulet war an « Ouest-Eclair », « Kroaz ar Vretoned », « Kloc'hdi Breiz ».

E 1903 e voent embannet en eul leor anvet « Mouez an Aochou », plijus kenañ.

Kenlabourer eo bet d'ar « Revue Celtique » hag « Annales de Bretagne ».

Desket mat e oa war yez Kerne-Veur (Cornique) hag aozet en deus eur geriadur.

Damantus eo n'en dije ket an Ao. Cuillandre kendalc'het da skriva e brezoneg.

Marvet eo e Roazon d'ar 4 a viz Meurzh 1955. Daoust ha Moleniz, ar re yaouank da vihana, a enoro an hini a zo bet ar barz Glanmor? Ha gouest int d'hen ober ? Ma n'eo ket re druezus stad ar brezoneg en enezennig !

L. L.

War zao !

...Me gar va Bro, me gar va Breiz,
Me gar he yez hag he feiz :
Ouz a nep 'ray d'ezhi brezel
Me 'stourmo betek mervel.
Me gar vo Bro, me gar va Breiz,
Me gar he yez hag he feiz ;
'Vit he difenn, me vez atao,
Evel va zadou, war zao.

Pa vezo deut pred ar maro,
Dispount, dinec'h, me 'varvo ;
Bebet am bo e gwir gristen,
Mervel a rin heb anken.
Pa vezo deut pred ar maro,
Dispount, dinec'h, me 'varvo,
O soñjal e vo Breiz atao,
E vo Breiz bepred war zao.

Jos CUILLANDRE « GLANMOR ».
(1881-1955)

(« Mouez an Aochou », 1903)

Bleun-Brug bras Landivizio

D'an 29 (Gwener), er patronaj, e Landi.

Azalek 14 h. 30 : Prezegennou diwarbenn istor ar **Bleun-Brug**, gant an Dimezell Mari a Gervengi, an Dokotr Dujardin hag an Doktor Cornic.

Kar roudou ar breur Constantius ha Glaoda 'r Prat pe an ar zoka-denn graet azalek hirio gant ar brezoneg er skol, gant Korantin Riou.

D'an 30 (sadorn).

Azalek 9 h. 30 : istor ar **Bleun-Brug** (kendalc'h), gant Herri ha Visant.

11 h. : ar **Bleun-Brug hag an amzer da zont**, gant an aotrou chaloni Fave.

14 h. 30 : **L'art de la Renaissance en Bretagne**, à partir du château de Kerjean e Keryann St-Nouga, par Jos. Le Doare.

21 h. 30 : **Noz Keryann**, e koun ar Bleun-Brug hag an aotrou Perrot, gant kanerien Landi ha Plougerne ha gant c'hoarierien Plougerne Sant-Nouga, ha Poullaouen. Dirak ar Maner sklerijennet.

Presesion ar goulou, dindan ar gwez bras.

Oferenn kreiznoz, lavaret gant an Tad **Alexis Presse**, abad Bod-gwenn ; Prezegenn gant an **ao. Gwillou**, person Lanhouarne. (Ar re a garo a c'hell komunia.)

D'an 31 (ar sul).

Eus 8 h. 30 da 10 h. 30 : e skol ar baotred : **Kenstrivadegou** : lenn, kana, displega, konta, prezeg.

Da 10 h. 30, war ar blasenn : **Oferenn-bred**, kanet gant an **Tad Demazur**, abad Kergonan, dirak an **aotrou kardinal Roques, arc'heskob Roazon**, eskibie nhag abaded Breiz. Prezegenn gant an **aotrou Quillé-véré**, person Plougerne.

Da 14 h. 30 : en eur park war hent ar gar : **Tro Breiz ar Bleun-Brug**, gant an holl gerioù ha 1.500 c'hoarier : kanaouennou, korollou, sonadegou... Dilhajou a bep korn a Vreiz.

Presesion vras parrezioù Breiz.

Bennoz ar Zakramant.

21 h. 30, er patronaj c'hoariva brezonek :

I. — **Etal ar Poull**, pezh farsus, savet gant an Aotrou Perrot, ha c'hoarier gant Paotred Sant-Nouga.

II. — **Mil pok**, pezh nevez flamm, savet gant an Aotrou Noël, person Plounevez-Kintin ha c'hoarier gant Kelc'-keltiek Rostren.


III. — **Ar Blogorn**, renket gant an Ao. Perrot, ha c'hoarier gant Landivizio-Bodilis.

Holl vignoned ar Bleun-Brug a vo e Landivizio d'an 29-30-31 a viz Gouere.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.

QUIMPER. IMP. CORNOUAILLAISE. — C.P.P.P. N° 21697





Amañ eo bet savet ar Bleun-Brug e 1905. Amañ, « Noz Keryann » a vo eun dudi d'an 30 a viz Gouere. Dirak ar Maner-mañ (Keryann-St-Nouga) e vo graet en noz-se, prosesion vras ar goulou, ha lavaret an oferenn hanter-noz.